

Abherve (?) Frañsez Valée a zine Abherve gwechou ‘zo. Bez’ e oa tro-dro 40 vloaz pa oa bet embannet ar skrid-se. N’ema ket “Barn ar vezventi“ e-barz leor Lukian Raoul, war ano Vallée.

Barn ar vezventi

War don : *Ar Basion vihan pe Telegg ar barz.*
An eil ton a zo bet savet gand an Aotro Bourgaut Ducoudray.
Modernaet eo bet an doare-skriva.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Er penn kenta
Euz ar bed-ma’
Doue ‘grouas
On tad Adam :
En ene splann
Ennañ ‘lakas.

Gwall-stlabezet
Dre ar pehed,
En e gaerder
Rentet e oa
An ene-ze
Gand on Zalver.

Tud ‘zo re stank
Hirio er fank
‘Stlej o ene,
Ouz e zota

Ha diverka
E vравente’.

En on touez-ni
Ar Vezventi
Eo ar gwaller
A goll an den
Ar wir skeudenn
Euz e Grouer.

Ha, deiz on Barn,
On diskouarn
A voubouo
Gand mouez skrijuz,
Yen ha klemmuz,
Mouez an Aotro’ :

« ‘Vidout, Breizad,
Ar gwella gwad
Euz ma halon
Am-eus skuillet,
Er groaz staget
‘Tre al laeron. »

« Sehed euzuz,
Anken spontuz
‘M-eus gouzañvet ;
Ha gwin c’hwerо,
Gand c’hoarz garо,
Din kinniget. »

« Ha, koulskoude,
Grasou an Neñv¹
‘Peus bet a-leiz ;
Rag ho sent koz
‘Denn ma bennoz
War douar Breiz. »

« Douar ebed
Ken benniget
Ha Breiz-Izel,
Gwir Vro ar Zent
En amzer gent,
Douar santel »

« He brezoneg
‘Vel ar mel c’hwek,
En gwir a-dal
Eur voger vein

¹ Neñv : distaget : Ne.

Rag an dud vrein
Euz a Vro-Hall.

Kaerad gweziou,
Furad gizioù,
'Dleje mired
O feiz didamm,
O ene splann
D'ar Vretoned ! »

« Hag evelkent,
Mamm-Vro ar Zent
'Zo 'n em gollet
Oh eva re :
A evaj kre²
'N-eus he beuzet. »

« Ha bern war vern,
'Barz an ivern,
E' kouezet oll.
Ma bugale !
Breiz, eun drue',
A ya da goll ! »

O ! ma breur ker,
Ma breur mezhier,
Tro kein, m'az ped,
D'an tech mezuz !
En anv Jezuz,
Lez da behed !

² kre : kreñ.